




DIALOG

Entre eur Person campagn ag ar Paysan, var sujet all Libera.



VAR DON : AR VRAN HAG ALL LOUARN

Gelaouit bretoned, eun discour a zo bet,
Bars en eur barros vras, en deiou tremenet,
Tre eur person savant, hag eur paysan mad,
Var sujet eun ene, deu e gorf da guittat.

Discan.

Ia var sujet libera, ia var sujet libera,
Ia var sujet libera, tralala (bis)

Ar Paysan.

Ponjour otrou person erru on dho occlet,
Allas ma fried paour, en nos man so marvet,
Ag on deut do pedi, vit ma vo delivret,
Lacat an traou ganti, ar c'haera vo gallet.

Canit eta libera, ia var an ton huella,
Canit eta libera.

Ar Person.

Contant bras ma den mad, d'ober vel ma lerfet,
Mes laret din mar plich, pe seurt class vo laquet,
Rag bea so tri glass, an tu all d'ar beorien,
Vit sovetat an dud, d'eus toull ar binijen.

Canet vo dei libera,

Ar Paysan.

Laret a meus gret dec'h ar c'hlass brassa a zo,
Vo laquet eviti, vit ma vo mad e zro,
A pa rancfen dibi, an anter ma mado,
Vit salvi e ene, assur me a raio.

Canit eta libera,

Ar Person.

Ar c'henta class a so, cant scoet en eur yalc'hat,
An eill a vo gret dec'h, an anter oell marc'hat,
Ag an trede erfad, so pemp scoet varn'hugent,
Goelit pini anhe, breman deuit da c'houlen.

Canet vo dei libera,

Ar Paysan.

Ell lec'h rei dec'h cant scoet, evit ar c'hlass kenta,
Me reio assur daou, mar be vit ar goella,
A pa rancfen guerza, ma divea rochet,
Credil otrou person, ganen vefoc'h paëet.

Canit eta libera,

Ar Person.

Neuze me verco dec'h, evit ar c'hlass kenta,
Rag goclet ran erfad, oc'h eun den ar goella,
O figur a blich din, goelet a ran erfad,
Tispignit oc'h arc'hant, n'eur feçon dillicat.

Evit pea libera,

Ar Paysan.

Larit oferennou, ar muia ma elfet,
Ken a oefoc'h erfad, vo salvet ma fried,
En dro d'ar varscaon vras allumit goulou coar,
Ma nijo e ene, evel eur goulm d'ar gloar,

Canit eta libera,

Ar Person.

Ma laro eviti, cals a oferennou,
M'ar goelan nessesser, me doublo n'hobidou,
Me raio labour vad, credi ellit en se,
Me raio ma fossUBL, vit salvi e ene.

Canet vo dei libera,

Ar Paysan.

Doublit ar golistret, sonit carillon bras,
Scuillit dour beniget, hardi leis eur varras,
Evit ma neo labour, ive 'n aspesjouer,
Lakit devi ezans, leun an ezansouer,

Canit eta libera,

Ar Person.

Itu hari d'ar ger, me raio ma never,
Me raio tout an traou, a gavin nessesser,
C'houi so eun exempl vad, vit ar baysantet,
Gand Doue er bed all, c'houi vo recompanset,

Evit pea libera,

Ar Paysan.

Neuze trou person, me c'ha da bartia,
Me a labouro cals, vit gallout o pea.
Me labouro er parc, entro pad ar sizun,
Me n'em brivo a dout, meneus d'eus ma butum,

Evit pea libera,

Ar Person da Vates.

Oh, goello den so bet, Mari deus ma c'havet,
Ennes so sur scoer vad, d'an oll baysantet,
N'eus ket feçon binvic all lorc'haj blich dean,
Mes me ne roan forç, ma gall dont d'am fean,

Oh, caerra tra libera,

Ar Paysan.

Donjour trou person, do ti e tistroan,
Demeus a galon vad, me so deut do pea,
Ma ellit prouvi din o peus gret/labour vad,
Neuze me o peo demeus a galon vad.

Evit cana libera,

Ar Person.

Den a zoujanç Doue, azeet n'ho coaze,
Me c'ha d'ober o cont, ne vo ket pell dale,
C'houi so eun den prudant, c'houi so eun exempl vad.
Oar dispign oc'h arc'hant, n'eur feçon dillicat,

Evit pea libera,

Ar Paysan.

Iseus trou person, diganec'h c'houlennan,
Celaouit ma reson, mar plich ganec'h breman.
Ma peus ket eur c'hopi, digant or mest divin,
Ellit neuze hardi, croaja var o calpin.

Oh, goassa tra libera,

Ar Person.

Penos monstr ar flammou, a te gredfe em zi,
Insulti mysteriou, d'eus an eucaristi.
Asta buan conti, cant scoet din me aze,
P'otramant vi daounet, ed an eternite.

Ma feas libera,

Ar Paysan.

C'houi so eun affronter, ag eur filouter bras,
C'houi so eun anter oas, evit ne oa Judas,
C'houi deu da drahissa, misteriou ar c'halver,
Pa deut da verza demp, maro sacr or salver.

En eur verza libera,

Cetu aman trou, cant scoet en eur yalc hat,
A ne vont ket dec hui, evit ober cher vad,
Pa n'hellit prouvi din, o p'eus gret labour vad,
Me ell assuri dec'h, n'och ket potr dillicat.

Evit cana libera,

Me o ped oll peorien, da zonet da gompreñ,
En parados Doue c'houi n'entrefoc'h biken,
Ma na pe ket arc'hant da bea o passaj,
An ifern vit biken a vo oc'h héritaj.

Ma beatit ket libera,

M'ho ped mignonet ker, ne gredit ket en se.
Ep arc hant antrefomp, en barados Doue,
Mes an oll veleyen, o deus bet invantet,
E renker caout arc'hant, evit bea salvet.

Evit pea libera,

Kement dor so er bed, alias ve digoret
Dre an arc'hant tentus, me oar ma mignonet,
Mes an aour, an arc'hant, en eur bern destumet,
Dor an env birviken, gante vo digoret.

Caer vo cana libera,

Propriété réservée de l'Auteur,

FIN

BLOCH